

AR BRAGOU MOAN.

War don : 'Nn hani zimizo d'i-mé;
(Les kerné.)

Bis. { Iannik en deuz chenchet giz, (*)
Eet hé réor da vourc'hiz. (Gé.)
P'euz ket mez , p'euz ket mez ,
Koz trouik manket ,
P'euz ket mez , p'euz ket mez
Chomm c'hoaz war (**) ar mez.

Na pérag eur bragou moan
Elec'h unan lédan. (Gé.)
C'hui po mez , c'hui po mez ,
Pa vo kléet ho toare ,
C'hui po mez , c'hui po mez ,
Ma trouik kez.

Réor ré bell war ann dorchenn
A ia da bladigenn ; (Gé.)
Bragou moan , bragou moan
Zo ret da gaout neuzé ,
Bragou moan , bragou moan
Vo roet d'ar potr Iann.

Iann kulotet enn-giz-sé ,
En-em-gav eur potr tré. (Gé.)
Treuz hé dok , touz hé benn ,
Mouchour war hé voellou ;

(*) Ar G dirag E hag I , azo ével dirag A , O , U .

(**) Al lizérenn W a vez lékéat élec'h V , U , OU . War , livrit ,
pear , pé ouar. Eur wéren , livrit , eur véren , pé eur uéren
pé eur ouerlen .

Treuz hé dok , touz hé benn ,
Hag hen kerzat plenn.

Mez mar welfec'h hé gof-gar
Ne gafec'h ked hé bar ; (Gé.)
Bragou moan , bragou moan .
A viro kement-sé ,
Bragou moan , bragou moan . . .
Treud ann traou dindan.

Eur breton enn hé zillad
A ziskoez éo potr mad. (Gé.)
Bragou gloan , gouriz ler
Ean-dro da vignonik ,
Bragou gloan , gouriz ler
Zo traou ré bouner.

Eur breton a holl-viskoaz ,
A zalc'h mad d'hé benn-haz. (Gé.)
Gwalennik glaz pé wenn
Fel d'ann démézelik ,
Gwalennik glaz pé wenn
Skanvoc'h da zougenn.

Hon tud koz gand gwirioné
Gwéchall a lavaré : (Gé.)
Bragou moan , bragou moan ,
ENN eur pégad labour ,
Bragou moan , bragou moan ,
A vo bépred góan.

Hor mammou pa oant iaouank ,
Merc'hédigou divank , (Gé.)
Eur zonik a ganent

— C'hui , merc' hed , deskit-hi . —
 Eur zonik a ganent ,
 Kléet petra larent :

« M'am bézo biken eur goaz
 « Vo unan bragou braz. (Gé.)
 « Bragou moan , bragou moan ,
 « Pez zo'barz ne dall tra ,
 « Bragou moan , bragou moan ,
 « Né dall ked ar boan. »

Mar t'euz bet digand da dad
 Askorn ha diouvorzad , (Gé.)
 Dalc'h mad d'as bragou braz
 Mignon mar em c'hrédez ,
 Dalc'h mad d'as bragou braz
 Na vézi ket was.

Mez mard'oud eunn denik flask ,
 Mar ma ta réor da glask , (Gé.)
 Bragou moan , bragou moan
 Zo mad d'id da gémér ,
 Bragou moan , bragou moan
 Den na lako van.

Bragou moan o tort er bed
 Tri faéron en deuz bet : (Gé.)
 Puchérer , garik-treud
 Ha iannik kergordenn ,
 Puchérer , garik-treud ,
 Tri dibuner neud.

Puchérer zo'r freullen den
 A gosté Rosporden ; (Gé.)

Krouget hé vragou striz
 Béteg hé ziougazel ,
 Krouget hé vragou striz
 Vel eur c'hoz bourc'hiz.

Garik-treud , bep noz timad ,
 A ié da grampoézat. (Gé .)
 Hag ar vrud a lavar
 Gand ki Marijanik ,
 Hag ar vrud a lavar
 Ma éet hé gof-gar .

Kergordenn hé benn touzet
 Gand hé c'hallektréoued , (Gé .)
 Zo bet eur bloa pé zaou
 O teski c'huitellat ,
 Zo bet eur bloa pé zaou ,
 Barz ar galéaou .

Bréman'ta kredid erfad ,
 Evid ho prassa mad : (Gé .)
 Mod ar mez gand mod ker ,
 Spont ann dud aféson ;
 Mod ar mez gand mod ker
 Ra d'hé kaout donjer .

C'hui péré a red bemdé
 Warlec'h gizou névé , (Gé .)
 O chench préeg , o chench mod
 C'hui rei é-ber-amzer ,
 O chench préeg , o chench mod ,
 Tud fal doc'h tud sod .